

Sell ouzh ar bed en un doare disheñvel

Louarnig

1944 - 2014



C. LEFEUVRE

En niverenn-man :



P.3-5

PAOTR
LOUARN

P.13



Naggeneen

P.7-8

Ar brakiozor

P.14

Beaj
Samuel



P.9

TITEUF



P.16

MEURIAO

P.10

E MIZ EVEN
1944...



Louarnig

Mensuel - N°141
du 1^{er} juin 2014
5 € an niverenn / 5 € le numéro
60 € ar bloaz / 60 € l'année
Niv. CPPAP : 0514680670

Embannet gant / édité par :
KEIT VIMP BEV 29520 LAZ

Rener an Embann /
Dir de Publication :
Yann-Fañch Jacq, yf.kvb@orange.fr


Kenurzhiañ, skrivañ, maketenniñ
Coordinatrice, rédactrice,
maquettiste :
Camille Argouarc'h,
camille.kvb@orange.fr

Moulet gant / imprimé par :
SOFAG, BP21 - 29590 AR FAOU
Skeudennoù a zo implijet gant
Aotre-Implijout Creative Commons
Dereñ/Kenrannañ
Credit photo CC : PH Gaillard
(p.2 gwenanenn)

Embannet gant skoazell
Avec le soutien de :



SANDRINE, PERAK EZ EUS BOSOÙ
ER C'HAÏVALED ?




Diane,

Bronneged ha geotdebrerien eo ar c'hañvaled. E stepennoù Azia (lec'hioù sec'h, un nebeud plant eno) pe en dezzerzh emaint o vevañ. Setu n'eo ket aes dezho kavout na dour na boued. O bosoù, a zo druzoni enno, a servij dezho evit lakaat boued a-gostez. Gant se e c'hell ar c'hañvaled chom devezhioù-pad hep debriñ, hep dezho da vervel gant an naon pe gant ar sec'hed. Hervez ar pezh a vez dalc'het ganto en o bosoù e c'hell ar re-mañ bezañ bihan pe bras. Pa vezont leun e c'hellont pouezañ etre 10 ha 15 kilogramm pep hini !

An dremedaled (ur bos hepken dezho) a zo kendirvi ar c'hañvaled. En Afrika e kaver deus outo.

Ken ar wech all !

Sandrine



Goulenn ha tresadenn gant Diane

Sav ur goulenn ouzh Sandrine ! Ma rez un dresadenn, e vo embannet ivez ! Skriv ur postel da camille.kvb@orange.fr pe ul lizher da Louarnig, Kelt Vimp bev, 22 grand rue, 29520 Laz

FOX-BOY

NE WELAN
TRA.

CHOM A RAID
NIZAR HAG
AR RE ALL
WAR MA CHONG.

ABALAMOUR D'AN ERCH
HA D'AM LUNEDOÙ
TORRET E REDAN HEP
DIN GWELET DIRAZON.

*Pell e voe a-raok tennañ d'ar poent mat war ar bleiz-se oc'h en em
ruilhal gant an tad. Lavaret en dije, abalamour d'ar blev kenmes-
ket gant an dilhad, e vezent unan graet diwar an daou anezho.*

Claude Seignolle - "Comme une Odeur de Loup"

'MAON O VONT
DA VEZAÑ
LINCHET* GANTO.

GOULEIER,
TROUZ...

FEST
BRAS
AR GOAÑV!

DA LÄRET EO E
C'HELLIN KUZHAT
ER MOR A DUD.

...ales de GAILLE

RANN 2

Ganet eo ar paotr louarn

ARVEST
2/3

MAT E VO.
REDEK, LEUSKEL HENT
GANTO HA LAMMAT
'BARZH UN TREN-BUZHUG.

UR WECH ER GER E
SKARZHIN AR FOTOIOU EUS
FACEBOOK HA WARC'HOAZH
E LAKAIN NIZAR HAG E
GENSEURTED DA VEZAN
SKARZHET EUS AL LISE.



LIPET
EO!

N'ON
KET,
NIZAR.

KET
C'HOAZH.



YO, BEN, SKO GANTI!

SELLIT MAT!

EY! DIWALL!

SIKOURIT AC'HANON!
'MAINT O VONT DA SKEIR GANIN!

BECH' DE'I!

KAOCH!

UH? PIU?

ARABED!



ARABED--
-- EVELDON HA MA CHAMALADED ???



BOURDET MEUS AZE.

REDEK DRE AN ALEZIOU PENNAJ.

UR MOR A'RU!

...N'EO NEMET MEKANIKOUI.
KEN BERRWEL ON 'MEUS KREDET E OA TUD!




SEP'AZE PETRA 'RA DRE FORZH LENN COMICS BEMP... AAAA!

AAH!

Deus da vezañ ur mailh war...

An dinosaored




Deus da vezañ ur mailh war...

65 milion
bloaz 'zo



Deus da vezañ ur mailh war...

An dinosaored



Pouez : etre 23 ha 30 tonenn

Uhelder : 14 m

Ledander : betek 25 m ;

Boued : plantennoù

Mod da vezañ : e troelladoù

Ur seot debrer eo ar brakiozaor...

Unan eus an dinosaored brasañ eo ar brakiozor... Ken bras has un ti pevar estaj anezhañ, ha krenñ a-walc'h evit dougen 10 olifant ?

Ur souzous divent a zo santañ ?
Peadra da savout e voued e laez tout ar swez ? Ha peadra ivez da douzañ ar raldenn pell pell dirak... e ya ?

Didroc'h war al linennoù

Lod a lavar e vefe kouezhet ur steredenn-red war an Douar... ha tan forzh peseмент soude se... Menezioù tan o tihuniñ has stufañ o vein tan...



Ludu o c'holoñ an oabl soude-se... has o kuzhat soulou an heol.

Met hep soulou deiz... seot ebet... slazad ebet... has hep slazad... seot debrer ebet ken... has echu sant ar brakiozaored... ha neuze echu sant ar c'his debrerien a rde o fred deus ar seot debrerien...



Tamm ha tamm eo aet an holl diwar wel... war bouez un nebeut slazarded bihan.

Peadra da lezel ur chañs d'ar bromesad.
(evel Mab-Den da skouer)
da ziorren dizañver...

Sell ouzh an heuliad en abadenn Mouchis Dall war France 3 Breizh hep sadorn vintin da 10e20

DINOSAURED

Diwar heuliad FR3 Breizh « An Dinosaored » sevenet gant Ronan Himen - Kenproduet gant France Télévisions Park ar Ragistor Malanseg/Parc de Préhistoire de Bretagne






AN

DILESTRADEG

d'ar 6 a viz Even 1944 e Normandi

US Army army.mil/d-day



PETRA EO AN DILESTRADEG ?

E-kerzh ar brezel 1939-1945 e oa c'hoarvezet.

Er brezel-se e stourme Bro-Alamagn, Bro-Japan ha Bro-Italia a-enep d'ar re all : Bro-C'hall, Rouantelezh-Unanet, Bro-Rusia, Stadoù-Unanet ha re all c'hoazh.

Lodenn norzh Bro-C'hall oa bet aloubet* gant an Alamaned abaoe 1941. Aozet e oa bet darvoud bras an « dilestradeg* » gant ar Saozon, an Amerikaned hag ar Frañsizien adal Bro-Saoz evit dieubiñ* Bro-C'hall hag Europa.

PENAOB ?

D'ar 6 a viz Even 1944, diouzh ar mintin ha daoust d'an amzer fall, e oa degouezhet miliadoù a Amerikaned, Saozon, Kanadianed, (hag ivez Frañsizien evel Gwenn-Aël Bolloré) dre vor ha dre nij war aodoù Normandi, evit

tagañ* an Alamaned, kuit dezho da gaout amzer d'en em soñjal ha

d'en en em aozañ evit en em zifenn.

Un trec'h* war an Alamaned e oa an dilestradeg a-benn ar fin rak dieubet eo bet kêrioù Bro-C'hall ha Breizh tamm ha tamm, e 1944 ha 1945. Siwazh e oa marvet ha gloazet miliadoù a dud. Beredoù divent* tud Amerikan ha soudarded all a vez kavet war aodoù Normandi.

GERIAOUEG AR BREZEL

Aloubiñ ur vro : mont dre nerzh en ur vro all evel mistri

Dilestrañ : diskenn eus bigi pe eus nijerezioù war an douar

Dieubiñ ur vro : lakaat ar bobl da vezañ mestr en-dro war he zouarou.

An trec'h : an tu-gounit

Divent : bras-kenañ



AN DILESTRADEG KONTET GANT UR BREIZHAD

Gwenn-Äel Bolloré a oa bet ganet en Erge-Vras e 1925. Brudet e oa e familh a oa e penn labouradegoù sevel paper en Erge-Vras hag e Skaer. D'ar 6 a viz Even 1944 edo e-touez ar soudarded a zilestras war aodoù Bro-Normandi. Setu e enñvorennoù...



D'an 18 a
viz Even 1940

Aliae marv va zad emamp o chom e Pariz. Met tremen a reomp hor vakañsoù en Erge-Vras pe e Beg Meilh. Mamm he deus kavet gwelloc'h tec'het kuit diouzh Pariz e miz Mae gant aon rak ar bombezadegoù. Hiziv em eus gwelet ar soudarded alaman kentañ e Kemper. Hag echu eo ar brezel? Gant ar Saizon, neo ket arvat. Ha Frañsien zo a glask mont en tu all d'ar mor evit kenderc'hel gant ar stourm. Laouen e velen da vont d'o heul ivez. Met n'on nemet pevarzek vloaz. Penaos oher?



An Alamaned e karter Kerfeunteun e Kemper
(Dast. Lise al Likès)

D'ar 6 a viz Meurzh 1943

Emherv ez aimp kuit eus Karanteg evit mont da Vreizh-Veur. Aliae mizioù e klasken penaos oher. A-drugarez d'am c'henderiv Marc Thulé ha d'ur strollad rezistanted eus Pariz em eus klevet kaoz diwar-benn chantier-mor Ernest Sibiril. Kempenn a ra ligi kozh dre guzh. Danjerus eo, kement a Alamaned zo er vro. Met meur a vag zo aet kuit evel-se, e breiz an noz. Va breur René a oa e-louzh an hini ziwezhañ. Hiziv e vimp nav war ur vagig war-louez seizh metr hirder dezhi, arvet *S'ils te mordent*. Qwerzhel em eus va marc'h Crevette evit sikour paeañ anezhi.

Ar vag *S'ils te mordent*
(Dast. bugale Gwenn-Äel Bolloré)



D'ar 16 a viz Meurzh
1943

Ouzhpenn 25 eur hon eus lakaet evit treuziñ Mor Breizh. Rust e oa ar mor. Ur wech en em gavet omp bet kaset d'ul lec'h degemer arvet « Patriotic School ». Eno omp bet goulnnataet e ken kaz ma vefe spierien en hon touez. N'on nemet seitek vloaz. Re yaouank on evit mont d'an arme-zouar. Met da vartolod e c'hellan mont. Pep martolod a rank deskiñ ur vicher all: *klañvdiour e vin-me*.

D'ar 5 a viz Even 1944


Aliae meur a viz emañ e-touez fuzuilherien-vor ar C'homando Kieffer. Adkarvet em eus va c'henderv Marc hag un toullad mat a Vretoned all. Pleustret hon eus kalz evit lezañ prest e poent. Studiet hon eus a-dost maketennoù ha kartennoù evit gouzout dindan enñvor petra hon do d'ober pa vo lañset an dilestradeg. Diouzh ar noz e teu kamionoù da gerc'hat ac'hanomp evit mont d'ar porzh ha lestrañ.

D'ar 6 a viz Even 1944

Pemp eur eo, poent eo pignat war ar pont. Tamm-ha-tamm e sav an deiz ha gwelet a reomp aodoù Bro-Normandi a-bell ha miliadoù a listri hag a vigi a bep-seurt hag a bep-ment tro-dro deomp. Trouz ebet evit poent. Hag en un taol e krog an holl lezhioù-kanol da dennañ. Pebezh safar ! Skeiñ a ra al listri-dilestrañ war-zu an aod ha krog eo an Alamaned da dennañ warno. Laosket o deus ar Saozon un tamm avañs deomp evit ma vefemp, ni ar Frañsizien, ar re gentañ o dilestrañ en hor bro. Ha bec'h dezhi ! Lamm a reomp en dour da vont war-zu an aod. A-zehoù hag a-gleiz e welan soudarded deomp-ni lazhet pe c'hlozet. Chom a ran a-sav e-kichen hini pe hini evit ober war o zro luan ha luan. Rak ret eo din kenderc'hel da vont war-raok war-zu Ouistreham.



Soudarded saoz ha paotred ar c'homando Kieffer a zilestras war an aod anvet « Sword »



Gwenn-Äel Bolloré hag e genderv Marc Thubé (Dast, familh Marc Thubé)

Ar C'homando Kieffer

177 soudard gall a oa er c'homando-se renet gant ar c'habiten Philippe Kieffer. Stummet e oant bet evit kemer perzh e krogadoù diaes. N'eus nemet 24 anezho ha ne oant ket bet lazhet pe glozet etre ar 6 a viz Even hag ar 6 a viz Gwengolo 1944.

Pennad savet gant Hervé Peaudecerf diwar enñvorennoù Gwenn-Äel Bolloré « J'ai débarqué le 6 juin 44, commando de la France Libre » (Ti-Embann Le Cherche Midi). Trugarez da vugale Gwenn-Äel Bolloré, da familh Marc Thubé, da vBenjamin Massieu



Naggeneen

SENARIO & TRESADENNOÙ : CHRISTOPHE BABONNEAU

BREZHONES C. ARZOUARH HA YF. JAOZ



PREST E DA AR BOESON
VURZHUDUS, HA NAGGENEEN
IVEZ DA REIÑ LAÑS D'AR
PEZH A VEZE GORTOZET
GANT AN HOLL : AN TAÑVA.



GWELET E VOE LIV AR
BLIJADUR WAR DREMMOÙ
AR RE GENTAÑ O TAÑVA.





MIL VAD A RAE AN
DOURENN-SE DEZHO.



SKUILHAÑ A REAS LOD
DAEROÙ DIOUZH O
DAOULAGAD,
KEN MAT MA DA.



N'EN DOA KET GRAET
NAGGENEEN GOAP OUTO.
UR BOESON A-ZOARE
AN HINI EO EN DOA FARDET
AZE DEZHO.




LAOUEN E DA O WELET AN HOLL
VOUDOÙ-SE, KEN EÜRUS,
TRO-DRO DEZHAÑ.



LAKAET EN DOA UR C'HASEDAD
WISKY EN UR C'HORN GANT AR
SOÙS KAS BOUTAILHADOÙ DRE
VAG D'E VIGNONED CHOMET E
BRO-IWERZHON.

Samuel beajour ha kontour

a di da di er broioù keltiek



Degouezhet eo Sam e Bro-Iwerzhon gant ar vag!

"Divizet em eus mont betek Donegal, ur rannvro e hanternoz Bro-Iwerzhon. Gouezeleg a vez komzet duhont. "Hurling" ha "Gaelic football" a zo an daou sport pennañ e Bro-Iwerzhon. Abred e krog ar vugale da zeskiñ reolennoù ar c'hoari-se."



Setu hurling



Bet eo Samuel o welet skolidi skoliataet e gouezeleg. Setu poltred o c'hlasad. Moaien zo da selaou ur ganaouenn kanet ganto war blog Samuel (sell e traon ar bajenn all)

Donegal



"Erruet on en ur "Gaeltacht" un takad lec'h m'o deus dibabet an dud bevañ a-unan gant ar sevenadur gouezelek dre ar yezh hag ar sonerezh da skouer. Roet zo bet din bod ha boued gant Suzann hag he merc'h, Alva. Plijout a ra dezho seniñ, kanañ. Tonioù brav zo da selaou war al lec'hienn. "

Setu Alva gant an akordeoñs bihan anvet "concertina".

Ha setu-me e bro-Skos !

Er skolioù e vez desket d'ar vugale seniñ gant ar
biniou bras !

Sed anezhi e brezhoneg

Kejet em eus ouzh ur c'honter kozh eus inizi bras
Skye : sell ouzh e poltred war an tu-dehou.

Kontet hon eus kontadennoù an eil d'egile e-pad 12
eurvezh da-heul ! Emichañs e talc'hin soñj eus an holl.



Gwisket e vez gant ur c'hilt (brozh hengounel Bro-
Skos). War enez Lewis on erruet, gwelet 'm eus ur
reunig er porzh ! Alies 'vezont gwelet amañ, o klask

pesked. Emañ an nevez-amzer o tostaat... Dav e vo din soñjal d'an
distro e Breizh... Hir 'vo an hent. Bro-Skos a blij din kalz
ha koulskoude on laouen o soñjal
distreiñ e Breizh...

Mont a rin en-dro a skol da
skol da gontañ ma beaj ha da
respont da c'houlennoù ar skolidi.

Kenavo ar c'hentañ !

E vazh a zo anvet
"Cromeg" : servij a rae
gwechall evit kerzhout
hag en em gannañ



Fotoioù e-leizh deus e veaj ha tonioù da
selaou war samuelallo.com, klik war "actualités"

